

8N3-2-043

15

Ha pa he deuz deomp ar Verc'hez  
 Merket kement a garantez,  
 Pa he deuz evidomp pedet,  
 Penoz kredi e vemp kollet ?

16

O Kalon Jesus, gouskoude  
 Lakit muioc'h a garante  
 En hor c'halonou dinerzet  
 Ha troet varzu ar pec'het...

17

Kalon Jesus, dre ho poamioù  
 Ha daelou Rouanez an Envou,  
 Dre ho maro, oh ! ni ho ped !  
 Pardonit deomp, p'hon euz pec'het !

18

Ha ra drec'ho ho karante  
 Fallagriez ho pugale :  
 Var ho Kalon-Zakr entanet  
 Tommit hor c'halonou sklaset.

J.-Y. G.

Imprimatur,

Quimper, le 22 mars 1922.

P. MESSAGER, v.-G.

5.284. — Brest. — Moullerez ru ar C'hastel, 4.

# D'ar Galon-Zakr

TON Piou bañaro pebez glac'h ar.



Lavarit din, pobl ken karet  
 Penoz e meuz ho klac'haret ?  
 Daoust hag a douez ar baianned  
 Ne meuz ket bêt ho tibabet ?

2

Ha gouskoude var douar Frans  
 Da m'hano ve gret dismiegans :  
 Va c'hrōaziou à zo diskaret,  
 Ha dalc'hmad e yen blasphemèt !

3

Peseurt grasou 'meuz deoc'h nac'hiet ?  
 Ho pro 'eo kaera 'meuz krouet :  
 Etouez holl broiou an douar  
 Ar Frans a zo bepred dispar.

4

Grasou puill e meuz deoc'h roet,  
 Araog m'hoo peuz o goulennet,  
 Ha diwallot e meuz hō pro  
 Diouz he enebourien garo.

5

Daoust há ze a veve kiriek  
 Vé d'an Iliz ha d'ar belek  
 Nac'het pep gwir ha gret brezel !  
 Her gouzanvet e meuz re bell.

6

Daoust ha ne meuz ket deoc'h roet  
 Chouech' deiz er zizun var o hed ;  
 Perag ouzin ez eo laeret  
 Ar zùl e meuz 'vidon miret ?

7

Savet e meuz sakramanchou  
 Evit rei perz e m' meritou :  
 Perag n'int ket darempredet,  
 Ez int a vec'h anavezet ?

8

Va Mamm evidec'h 'deuz pedet,  
 Var ho pro deuz bet lenvet,  
 Ho pugale 'deuz keleñnet ;  
 Siwaz ! ne ket bet selaouet ! ...

9

O Kalon Zakr euz va Jesus,  
 Ia ! kement-se zo glac'h arus ;  
 Mes 'vit skuill beanoz ha pardon,  
 Digorit, Jesus, ho kalon !

10

Salver Jesus, dre ho poaniou,  
 Ankounac'haït hor pec'hejou ;  
 Truezit c'hoaz, roit deomp pardon !  
 Vit se eo digor ho kalon.

11

Anzav a reomp hon euz pec'het ;  
 Truez, o Salver benniget,  
 Truez abalamour d'ar fae.  
 Hon euz gret var ho karante !

12

Daoust gouskoude ho Merc'h hena  
 N'he deuz ket bepred da genta  
 Gret hoch' anaout hag ho karet,  
 Hag hoch' Aviel embannet ?

13

Potred dispont a ve kavet  
 Vit difenn ho kwiriou bepred  
 Var douar Breiz hag e Bro-C'hall  
 Hirio kerkoulz evel gwechall.

14

Galvet hoc'h euz hor iaouankiz  
 Da rei o buez d'an Iliz :  
 Daoust ha kilet 'deuz aliez,  
 Pe zoken klasket digarez ?